

CHANSON DES COLLABORATRICES IN BREZONNEC

1

Ama epad ar brezel a mEMP goueled a ne
Eur certain merhet yoanc ag eur certain groague.

Refrain : Eoar ponchou Paris
Merhet a voant ket kuis
A collabori franchement
Gand ar baotred vaillant.

2

Ia collaboret a deuz a corf ag e galon
Goueloc'h e cavind eur boche o ia vit eur breton
O ia bars eur parcou
Vije a rendez-vous
Gred gant ar frigolin
O na merhet Pétain.

3

Gred a deuz gante couverse in tout ar fessoniou
Deibi reont ar gateaux evan ar boissonniou
Ar paoukès francijen
Starde o ceinturen
Ag a zebe bara du
A hep cavet guin ru.

4

A hoas a de a hirie a he uel o fen
Pa neoket bet ar cisail eoar o feruquen
Gred a deuz afferiou
A gered millionou
O ia gant paotred Hitler
A zo bet amzer guer.

5

A pe voant eru ama a Americaned
Et voant bars ar pen kentan mestrezed ar bochet
Prest a voant adarre
D'ober converse gante
Ia ar merhet faro
Oa ru deus o guino.

6

Arog an dut a fesson fot de dean partout
Hardi oh evit bleizi a hoas na reont ket fout
Pe eur boche pe a russet
Gand a veant caresset
Ar merhet didalve
Eoa bars ar vro me.

7

Monet reint da vale oar varc'h a bars in train
Mar plich ebars in eil classe ia gand ar frigolin
Darn a heait dar parc course
Evit ober dans a ours
Nont drompint ket da choas
Dalc'h mad eur mestrou bras.

8

Bean oa merhet gentil o ia bars ar vro me
Kasset a vije café dar boche bars ni ouele
Ar paourkez patriote
Nag a zo bet eur zod
A kousket ar parcou
A traited deur voyou.

9

Goueled a mEMP a nom bro ia kalz a verhet koant
Verzan o hamaraded dar bochet franchement
Neuze ar francijen
Dappe eur lardaden
Kaeite oa ar merhet faro
Soignal bochet nom bro.

10

Breman pa heont da vale deuz tout toiletten guer
Car gered a deuz paper ia gand paotred Hitler
Pa vo ket kin arhent
Neuze vo chancement
Car red a vo labourat
Ben kat toiletten vad

11

Glahar neuz merhet Vichy yoanc a dimeet
Aboe eo fin dar brezel a collet ar bochet
Deusket ken a souten
Ag a reont pinijen
Nag a mant noz a de
Pedi ar croix gammée.

12

Soueted deus ar victoire ia da Allemanted
Car ama ebars in Bretagne a hint bet goal soignet
Duman ebars in kaer
Heait viou bars ar belouer
A souhaited la guerre
Ag ar victoire d'Hitler.

LE GAC René.

Eur ganaouen var trubuilhou ar bed

1

Me o ped koz o yoanc dober intention
Var eur zon e composan dec'h gand kalz a poan galon
Ia pe non lakan da sonjal a me chagrin a glahar
O gouelet pesort buez trist a renomp var an douar.

2

Ia gouelet remp eur vuez trist e tremen var an douar,
Ne peuz ket med ober eur zel evar er lever histor;
A hoas na neo het red demp o nan monet goal bel,
Peguir barz amzer eur den a zo bet taer brezel.

3

A pa pezo graet o calcul in nao bloa a tri uguen,
Eo bet draillet demp om bro gand an enebourien,
A delc'h mad er meumez reo in nom bro zo bet lampet,
Kredet e hanou mignonet trist a heo da ouelet.

4

A bet dismantet arhant dober linen Maginot,
Evit ne vije het ar bochet vit donet ken in nom bro,
Med kasset voant ar soudardet kazi tout dar Belgique
Peguir er complot voa gret eur bloa rog in Munich.

5

Eur groz vraz deuz an armee dar Belgique evoa kasset
Da sifen porz mor Dunkerque e hep bean armet,
An armee gouellan voan in France enan evoa chomet,
Ag e hane paotret Hitler ia neuze eoa partiet.

6

Ia e hane voant deut var draou het a hed gand ar mor,
A partout lec'h a tremenint e gavint dor digor,
A ken founus ag in avel e teuint gand an necho,
Tapet gante porz mor in Havre a hini Saint-Malo.

7

Goneet gante ar victoire a mest ar continent
Pe voa komeret porz mor Brest ag ive Lorient
Gred a he gante in dro tout an armee dastumet
A kasset dan Allemagne evel eur vanden louined

8

Preparet neva Hitler ia un arme puissant
Evit occupi demp om bro gand i soudardet vaillant
Dustu deva non installet ama evel barz ar guer
A gante er merhet koant e gave ber in amzer.

9

Eru mad voant gant in dud partout barz er herio,
Eur gouele mad de gousket ebarz ti an otro.
Nemed evidomp na neusket e vite ken excus
Kar eur vech ma a hint bet o ia goal dangerus.

10

Da zi guentan dre ama evoant gentil e oah,
Kaeite voant tibi om aman ag ive an uo poah.
Fried vije de an uo debi reint ar gateaux
Ar saucisson he gante alleis o musetteno.

11

Ar cognac ag er champagne ar chery a triple-sec
A hevint dober casse-croute e gant an uo friter.
Ag i spenn an draze hoas e deuz videt ar vro,
Prenan reint ar leireier zei ag an dentellezo.

12

Ag in pad an amzer ze eoa ar patriotet
Ebarz eur parkou er hoajou noz an de e kousket
Ia kousket a reint e maez koulz in noz evel an de
A chasseet eveli eur hatt petr-aman vel moc'h gwe.

13

A mar dije eur malheur na de vean tapet
Pesort souffrance e deuz bet arog bean marvet,
Tout ar poannio cruellan e deuz renket enduri,
Biskoas evar in douar ne voa gouelet ken kri.

14

Nemed deuz tout er poannio ze faut ket ken causéal,
Pe nomp ket bet in Dachau na ive in Buckenwal.
Houlennan ket lared dec'h er pez zo barz ma fenn
Med goueled meuz milicienet gand eur vittrailletten.

15

A pe non lakan da sonjal ebarz malheurio ar vro
A goueled hoas kalz e dud ia zeder mad o gueno
Pere deuz graet o fortune e var ruinio ar bed
Gant a reo e zo maro na nenket occupet.

16

A koulzcoude eur dra gaer e deuz demp sauvetet,
Liberte da vale noz an de e mempp gallet cavet.
A me o ped koz a yaouanc non lakat da comprenn
Eo deuz peurz er brezellou mar bevamp gand er garten.

17

Sonjet barz bugale ar bed a surtout i nom bro
Pere ne zo hoeh bloa zo a vevan gant kartenno,
Ar bed oll deuz affamet an impalerien infam
A lakat pevar horn ar bed ia in tan ag in flam.

18

Eur oalen deuz in terruppan a dremen barz er bed,
Goasoc'h eo bet er vech ma evit ar brezel perzec
Eur million anter e dud ar brezel all voa chomet,
Merquet eo var an histor dan dud tout da ouelet.

19

Evid lared ive eur gomz var in deg a tri uguen
Evoampgouerzed vel er vech ma e gant an otro Bazaine
Pevar mis voa om zud koz ia bet gante cernet
Ebarz er guer a capital debi a reint a razet.

20

A settu aze mignonet o labour om zud vad,
Lakat trubuilhou var ar bed in eur skuillan ar goad
A breman arog finissan larefomp gant confiance
Labourat tout assemblez da laret vive la France.